

**Kantik an noz.**

Pa ian em goele supozan  
em bez a c'hourvezan. (1)

Dond a reï an dervez divezan  
ne hallin mui sevel a nezan.

Na mar divunan e kreïs an noz  
Kent ma ne alfen ket kaout a repos.

Lavaran va devotion  
Evid kontempli d'ar bassion

Pe otrament chonjal en poaniou  
A souffr en tan an eneou.

Er Purgator arretet  
D'an ivern ar re zaonet.

Mar nom be kent diezamant,  
Chonjomp bebes inouamant

Ar voeïen dezo va Doue  
Da erzel eno bebret

En eur goele a dan  
Eb kaout biken repos vad.

Kouskomp entre divrac'h Jezus  
En eur lavaret an In manus.

In manus tuas Domine  
Jezuz recevit va îne !

Jannton Puil, 9 juin 1851.

(1) e (devant : C'hourvezan) me semble avoir été corrigé en a (par un trait).